



## IV. — SOUDARDED BREIZAD



### 1. Maro Yann Corbic, dirag Sebastopol (1855).



P'edo en he wassa brezel braz ar C'hrime,  
Pa oa Sebastopol kelc'het gant hon arme,  
Kennerzet gant ho feiz soudarded Breiz-Izel  
A stourme kalounek, prest ato da vervel.

Etouez ar zoudarded ginidik euz hor bro,  
E ioa eur c'haporal Yann Corbic he hano,

Eun den hag a virit dre holl beza meulet  
Evit he nerz-kaloun, hag he feiz ken parfet.

Goude maro Corbic, he gabiten gant prez  
A skrivas eul lizer da bersoun he barrez (1),  
Da gass kelou d'he dud ha d'he holl genvroïz  
Euz he varo kristen ha leun a vaillantiz.

« Yann Corbic, emezhan, hen deuz renet ama  
Buez eur guir zoudard direbech e pep tra ;  
Ha, pa rankas mervel, hen deuz heb klemm ebet,  
Resevet ar maro 'vel eur c'hristen parfet.

« Maro eo guir vugel da Vro-C'hall ha da Vreiz,  
Maro en eur ziskouez e oa eun den a feiz,  
Rag he zonz diveza zo bet evit an Ee,  
He gomzou diveza eur beden da Zoue.

« Pa velis oa skoët, ha guall skoët zoken,  
Buhan d'an ambulans e lakis hen dougen,  
Mes, keit m'edo en hent douget var eur c'hravas,  
E santas n'hen doa mui pell da veva, siouaz !

« Neuze d'an dougerien e lavar chom a za.  
Ema tost, emezhan, va zermen diveza ;  
Ho pet ar vadelez, araok ma tremenin,  
D'am zikour da vont c'hoaz eur vech var va daoulin.

« Hag eur vech daoulinet, evel ma c'houlenne,  
Corbic a lavaras eur beden da Zoue ;  
Ha dreizhi kennerzet, konsolet var eun dro :  
Breman 'vad, emezhan, e c'hell dont ar maro !

« Corbic var an diskoaz zo sammet adarre.  
Varzu an ambulans e talc'her da vate,  
Mes, ne c'hell ket e beo mont tre beteg eno ;  
Pa zigouez, ne gaver nemet eur c'horf maro.

« Eur maro ken kristen a raio d'he gerent  
'N em gonsoli o koll an hini a garent. »  
*Mervel evit ar vro a zo sur eun dra vraz ;*  
*Mervel en eur bedi a zo kalz kaeroc'h c'hoaz !*

(1) Sant-Nicolas-ar-Pelem, eskopti Sant-Briek, ha grechail eskopti Kemper.

## 2. Klenved ar vro.

Ton : *Ma c'halon a zo fraillet.*

Vardro divéz ar brezel, ar brezel ken heuzuz  
A zavas, en hon amzer, 'tre Bro-C'hall hag ar Pruss,  
E Genev, en hospital, edo tost da vervel,  
Eur paour kez soudard yaouank ganet e Breiz-Izel.

Keit ma hen doa bet yec'hed da vont var an dachen,  
Hen doa stourmet kalounek, 'vel eur zoudard kristen ;  
Mes, an hini oa choumet bepred stard en emgann  
Gant ar riou, an dienez oue diskaret buhan.

Setu hen kouezet guall glanv, kaset d'an hospital ;  
Mes eno ouz he glenved e stag eur c'hlenved all :  
Deiz ha noz da Vreiz-Izel he spered a zistro,  
Ha gant he galoun, siouaz ! ema *klenved ar vro.*

Guall stard eo dezhan mervel ken pell dioc'h douar Breiz,  
Ha ken pell dioc'h he gerent, hag e lavar eun deiz :  
« Araok mont euz ar bed-man, me 'meuz c'hoant, ha  
[c'hoant braz  
« Da velet da viana va zad eur vechik c'hoaz. »

Raktal e kaser kelou da dud ar zoudard kez.  
Neuze pebez kalounad ! Neuze pebez enkrez !  
Koulz koude eun tamm fizianz 'n ho c'haloun e talc'hont :  
Marteze n'eo ket kollet .. He dad ielo du-hont...

An hent zo hir ha poaniuiz : treuzi Bro-C'hall a bez ;  
An tad ive zo guall goz. Mad ! mont a ra gant prez.  
Dizale, a bouez poania, setu hen digouezet :  
He vab a zo dirazhan... Eun druez he velet !

Pa vel ar paour kez klanvour he dad en he gichen :  
« O va zad ker, emezhan ; breman 'varvin laouen ! »  
— « Arabad digourachi ! a respountas an tad ;  
« Arc'hant emeuz digasset ; me 'breno d'id traou mad... »

« — Traou mad ! eme ar c'hlanvour. O ne dalv ket !  
[Pell zo

« An traou ar guella blazet emeuz donjer outho ; »  
Hag e kouezas adarre skuiz-marro ; hag he dad.  
Oc'h he velet a zave an dour 'n he zaoulagad.

Ne c'houie petra d'ober, pa deuas da zonzjal  
Ez oa choumet 'n he zilerc'h eun tamm bara segal,  
Hag e kinnig anezhan d'he vab, 'n eur lavaret :  
« Sell aman eun tamm bara græt gant da vamm garet ! »

Kerkent ha ma eo kouezet ar gomz-se 'n he skouarn,  
Ar c'hlanvour, o vouzc'hoarzin, a astenn he zaouarn :  
« O ! eun tamm d'in, emezhan ; rak, naoun emeuz  
[brema ;  
« Abaoue keit all amzer n'emeuz debret netra ! »

Goude ar begad kenta e c'hoanta kaout eun all,  
Hag eun all c'hoaz... Ar c'hlanvour bete neuze ken fall  
A zant ema adarre he nerz o tont en dro.  
Hen araok ken drouklivet a zeu dezhan liou brao.

Ha dalc'hmad e lavare, dre ma zebre eun tamm :  
« C'houeka bara eo heman ! bara græt gant va mamm ! »  
Bemdez, adalek neuze, ez eas var vellât ;  
Ha dizale d'ar gêar e tistro gant he dad.

Enëou ar gristenien aliez zo henvel  
Ouz korf ar zoudard breizad ; dare int da vervel.  
Ha ne deo ket eur zouez ; rak eleiz a ziouer  
Magadurez ho ene : Sakramant an Aoter.

C'hoant hoc'h euz-hu da zerc'hel hoc'h ene beo ha krenv ?  
Gant ho mamm, ar guir Iliz, ema bara an Env.  
Debrit outhan aliez, ha c'houi velo neuze  
Pegen c'houek eo d'ar galoun, pegen mad d'an ene.

---